

FEIZ HA BREIZ

K
A
N
T
I
K
O
U



Langleiz

**BLEUN-BRUG AR SENT
E KASTELL-PAOL**
da 4, 5 ha 6 a viz Eost 1950

KANTIKOU BLEUN-BRUG AR SENT

Da veza kanet e-doug
Baleadeg ar Sent,
Prosesion ar goulou,
An oferenn hanter-noz,
An oferenn-bred,
Bennoz ar sakramant.

Aotre da Voula :
Kemper, 12 a viz Mae 1950
J. CADIOU, vikel-vras.

— 3 —

En ano an tad hag ar mab hag ar spered santel.
Evelse bezet graet.



HON TAD

Hon Tad, hag a zo en nenv, hoc'h hano bezet santelaet; ho rouantelez deuet d'eomp; ho polontez bezet graet war an douar evel en nenv.

Roit d'eomp hizio hor bara pemdeziek; pardonit d'eomp hon ofansou evel ma pardonomp d'ar re o deus hon ofanset; ha n'hon lezit ket da goueza en dentasion, met hon diwallit diouz an droug.

Evelse bezet graet.



ME HO SALUD

Me ho salud, Mari, leun a c'hras; an Aotrou Doue zo ganeoc'h; benniget oc'h dreist an holl gwragez; ha benniget eo frouez ho korf, Jezuz.

Santez Mari, mamm da zoue, pedit evidomp, pe-c'herien, breman ha da eur hor maro.

Evelse bezet graet.

LETANI SENT VREIZ

Aotrou, Ho pet truez,
 Krist, Ho pet truez,
 Aotrou, Ho pet truez ;
 Treinded Sakr, Doue unan, Ho pet truez ;
 Santez Vari, Mamm da Zoue, pedit evidomp ;
 Itron Varia Vreiz, pedit evidomp ;
 Santez Anna, hor patronez, pedit evidomp ;
 Sant Erwan, Tad ar Vretoned, pedit...

Sant Samzun,	Sant Herve,
Sant Brieg,	Sant Ildud,
Sant Malo,	Sant Briak,
Sant Tudual,	Sant Maodez,
Sant Kaourantin,	Sant Arzael,
Sant Paol,	Sant Maoris Langoned,
Sant Padern,	Sant Ronan,
Sant Melani,	Sant Kado,
Sant Kler,	Sant Salaün,
Sant Gwilherm,	Sant Jezekel,
Sant Yann ar Gael,	Sant Eflam,
Sant Donasian ha Rogasian,	Sant Loeiz Grignon Monforz,
Sant Gwenole,	Santez Enora,
Sant Gwenaël,	Santez Gwenn,
Sant Gweltas,	Santez Nonn,
Sant Meven,	Santez Trifina,
Sant Konvoion,	Sant ha Santezed Breiz,

Oanig Doue, a lamm kuit pec'hedou ar bed,
 Ho pet truez ouzimp (teir gwech).
 Salvit, Aotrou, ho servijerien,
 Pa sellont ouzoc'h gant esper.

PEDOMP

Doue, hag hoc'h eus lakaet ho Sent da ziwan war zouar Breiz, a-hed ar c'hantvedou, roit d'hor Bro, gant o skoazell, ar c'hras d'adsevel e nerz ho reizder, ma tiwano en hon touez sent nevez evit gloar ho Rouantelez. Dre Jezuz-Krist, ho Mab hag hon Aotrou, a ren hag a vev ganeoc'h en unvaniez ar Spered Glan, a zo Doue, a gantvedou, da gantvedou.
 Evelse bezet graet.

PEDENN EVIT BREIZ (1)

Y.-P. Kalloc'h

Deut omp holl d'ho pedi, Jezuz, war hon daoulin,
 da glask en ho kalon konfort 'vit hon anken :

Jezuz c'houi hor c'hlev, c'houi hor gwel :
 Ho pet truez ouz Breiz-Izel.

O ya ! chomit ganimp ! Hepdoc'h ne domp netra.
 Hepdoc'h eur bobl a varv 'vel eur c'horf hep bara.

War ho kalon ma n'o gouarnit,
 da biou ez ay ar Vretoned ?

Salver karantezus, d'an druez douget oc'h.
 Ho pet soñj eus ar gwad hon eus skuilhet 'vidoc'h.

O Mestr, ho pet soñj ez omp bet
 soudarded ho kroaz dre ar bed.

Ho pet soñj eus hor mez, eus hon trubuilhou holl !
 Truez ! Na lezit ket hor bro da vont da goll !

Ni ho ped, hon tal ouz an douar,
 ouz hor c'hlemm na veit ket bouzar.

Ha c'houi, Tadou ar vro, c'houi Sent koz holl doujet,
 p'emaomp skuiz el labour, d'hon harpa darnijit.

Roit dimp nerz e kreiz hon anken.
 Gwarantit Breiz da virviken.

(1) Ton ar bedenn-man a vo kavet war « Kroaz-Breiz » Pask.
 Elec'h beza kanet, e c'hello ivez beza lennet.

KANTIK SENT BREIZ

War don: « Patronez dous ar Follgoad ».

Diskan :

Sent karet a Vreiz-Vihan, kaera bleuniou hor gouenn,
eus bar skedus an neñvou selaouit hor goulenn.
Levenez ha karantez, skuilhit war douar Breiz.
Mirit enni, kudennet (1), hor yez koz hag hor feiz.

1. War ho pezion burzudus, ebestel Breiz-Izel,
hon tudou koz anaoudek o deus, gant o c'hizel,
savet ilizou dispar, eo enno eun dudi
deoc'h selaou ar Vretoned diredet d'ho pedi.
2. E Breiz-Izel, en aner n'ho peus ket labouret,
an had kouezet eus ho torn, gwrizioù don o deus grêt.
Ha daoust d'an avel-ifern a zourc'houez e pep bro,
hor feiz a jom bepred start, evel hor gwez dero.
3. Ni fell e ve Breiz-Izel, evel m'ho peus hi grêt,
gant he feiz, he brezoneg, he gizioù koz bepred;
Ni fell bez' anavezet evit ho pugale,
hag en hent ganeoc'h merket, ni boanio da vale.
4. Keit ha m'he do Breiz-Izel ar mor glas da c'houriz,
o yez santel 'vo komzet ha karet gant Breiziz.
Ha d'he c'homz pa ehanint, 'vo nemet da c'hedal
he c'homz ganeoc'h da viken, pa vezint er bed all.

(1) Unanet.

KANTIK SEIZ SANT BREIZ

War don: « D'hor Mamm, Santez Anna ».

Diskan :

O Seiz Sant glorius, klevit eus lein an neñv
ar bedenn a ra deoc'h Breiziz, ho pugale.

1. Gant grad vat hag enor, a bell zo hon tadou
o deus savet 'vidoc'h ar c'haera ilizou.
2. Grêt hoc'h eus labour mat, a-dreuz hon douarou:
ar feiz hoc'h eus roet dimp, taolet he deus gwrizioù.
3. Breiz 'zo deut eun douar goloet a vleuniou
a daol betek an neñv c'houez vat ar vertuzioù.
4. 'Vit ma chomo bepred frouez santel ho labour,
o Patroned hor Breiz, dalc'hit mat d'hor zikour.
5. 'Vel hon tadou gwechall, ganeoc'h bet badezet,
ni vezo kalonek ha direbech bepred.
6. Ni 'venn rei sked d'hor bro, d'hor brezoneg, d'hor feiz,
beza eurus ganeoc'h er baradoz, eun deiz.



PEDENN EVIT BREIZ

Y.-V. Perrot

War don: « Lavaromp ar japeled ».
(Kantikou toniet Kemper, n° 71, p. 111.)

Breiziz, kouezomp d'am daoulin, hag hep fallgaloni,
pedomp Jezuz da gemer truez ouz hor bro-ni.

Breiz diskaret, eur piled nebeutoc'h a skedo!

War aodou ar c'hornaouog na teñval e vezo!

Breiziz, pedomp a galon, ma vo adsavet Breiz,
en he c'haer, evel gwechall, gant he yez hag he feiz.

Hep feiz kristen er broiou n'hell beza urz ebet.

Hep brezoneg kennebeut n'hell beza Breiz ebet.

ADOROMP HOLL !

I — Adoromp holl, e Sakramant an Aoter,
Doue kuzet, Jezuz, hor Mestr, hor Zalver.
Sperejou evurus, Elez ar Baradoz,
Gant karantez a dan meulit-heñ deiz ha noz.

II — Gwir Vab Doue, en em c'hraet den d'hor prena,
En osti sakr oc'h kuzet 'vit hor maga;
Plijet ganeoc'h skuilha, eus ho tron an aoter,
Warnomp daoulinet amañ ho pennoz, va Zalver.

III — Enor ha gloar ha karantez da Zoue:
D'an^h Tad, d'ar Mab, d'ar Spered Santel ive;
Ra vezo e pep lec'h an holl grouadurien
Aketus d'e veuli hirio ha da viken.

O ELEZ AR BARADOZ

- 1 — O Elez ar Baradoz, sellit war an aoter;
 Ha gwelit pebez enor a ra d'eomp hor Zalver;
 Eur wech evit hor prena eo bet en em c'hraet den,
 Ha bemdez 'vit hor maga eus an neñv e tiskenn.

DISKAN

Mari, gwir Vamm da Zoue, Mari, va Mamm dener,
 Va zikourit da reseo ho Mab ha va Zalver;
 Me ne d-oun, siouaz netra! netra nemet pec'hed,
 Met ennoc'h am eus fiziañs, o va Mamm benniget.

- 2 — Krouer an neñv, an douar, Doue holl-c'halloudek
 A ziskenn war an aoter dre gomzou ar beleg;
 Eun Doue kalz uheloc'h eget an holl stered
 Dindan spesou ken dister a zo 'n em izelêt.

- 3 — An Doue a jom atao er memes stad eürus,
 Hag a zoug ar bed krouet war balf e zorn nerzus,
 En em lez dre ar beleg da veza dougennet,
 Evit diskenn e kalon ar paoura 'zo er bed.

- 4 — O burzud ar souezusa e-touez ar burzudou,
 O burzud na c'hell kompren ar c'haera sperejou!
 Evit gounit kalonou ho pugale divat,
 O magit, o va Jezuz, gant ho korf hag ho kwad.

- 5 — Mar deo dister kalonou ar Zent hag an Elez
 Evit karet eun Doue ken din a garantez,
 Penaos e prizit, Jezuz, dre ar gomunion,
 Eus hor c'halonou sklaset dont da ober ho tron?

- 6 — Penaos kredi azeza ouz taol ho karantez,
 Goude beza disprizet ho lezenn alies?
 D'ho taoulagad, va Zalver, n'hon eus ken da ginnig
 Nemet kalonou saotret, kalonou reuzeudik.

KANTIK AR BARADOZ

I

Jezuz pegen bras 've
 Plijadur an ene,
 Pa vez e gras Doue
 Hag en e garante.

II

Berr 'kavan an amzer
 Hag ar poaniou dister,
 O soñjal deiz ha noz
 E gloar ar baradoz.

III

Pa zellan en neñvo(u).
 Etrezek va gwir vro.
 Nijal di a garfen
 Evel eur goulmig wenn.

IV

Gortoz a ra gant joa
 An termen diweza:
 Mall am eus da welet
 Jezuz, va gwir bried.

V

Kerkent ha ma vezo
 Torret va jadenno(u).
 Me 'n em zavo en er
 Evel eun alc'houeder.

VI

Tremen a rin al loar
 Evit pignat d'ar c'hloar;
 Dreist an heol, ar stered,
 Me a vezo douget.

VII

Aet pell diouz an douar,
 Traonienn leun a c'hla-
 [c'har,
 Neuze me 'ray eur zell
 Ouz va bro Breiz-Izel.

VIII

Goude pred ar maro,
 Gant joa me a gano:
 Torret eo va jadenn,
 Ha me libr da viken.

IX

E-kreiz an enoriou
 Hag ar meuleudiou,
 E vin digemeret
 E palez an Dreinded.

X

En holl boaniou kalet
 A gorf hag a spered,
 Me 'zonjo deiz ha noz
 E gloar ar-Baradoz.

DA FEIZ HON TADOU KOZ

DISKAN

Da feiz hon tadou koz, ni pôtrez Breiz-Izel,
Ni 'zalc'ho mat ato;

'Vit feiz hon tadou koz hag en-dro d'he baniel,
Ni holl en em stardo.

Feiz karet hon tadou, morse ni ho nac'ho,
Kentoc'h ni a varvo! (3 gw.)

I — Keit ha ma lugerno, e bolz uhel an neñvou,
Ar stered hag al loar gant an heol benniget,
Ni a gerzo divrall gant hent ar gourc'hemennou
Hag a vevo dalc'hmat 'vel gwir gatoliked.

II — Keit ha ma vezo mor da luskellat Breiz-Izel,
Da floura he aochou, da bokat d'he reier,
Kristenien e chomimp, en despet d'an holl vrezel
A ray d'comp an dud fall, marc'hadourien geier.

III — Ni 'zo Bretoned yac'h, dispont e-giz hon Tadou;
Birvi a ra ennomp kalon ar gwir zoudard.
Eur Breizad hag a dro da-heul ar fals-kredennou
N'eo ket eur gwir Vreizad, n'eo nemet eun
[trubard!]

KANTIK SANT KAOURINTIN

WAR DON: Petra 'zo nevez e Ker-Iz.

DISKAN

Me ho salud war va daoulin,
Va eskob mat sant Kaourintin;
Ra vezo skrivet em ene
Hoc'h ano hag ho karante.

1 — Sant Kaourintin eo hon tad mat
Ganet er vro-mañ eus hor gwad.
Mont a reas d'ar Meneou,
Evit beza holl d'e Aotrou.

2 — Eno kuzet diouz tud ar bed,
Meur a vloavez en deus bevel,
O lenn bemdez ar skrituriou
Hag oc'h ober pinijennou.

3 — Gant re vras naon pa n'helle ken,
E taouline d'an douar yen,
E-tal feunteun e beniti,
Hag e kave eur pesk enni.

4 — Eun deiz, Gradlon, ar Pen-tiern
O chaseal e Plouidiern,
A gavas ar sant o pedi,
Daoulinet en e beniti.

5 — Tud ar roue, en eur c'hoarzin,
A lavaras da Gaourantinn:
« Ni 'zo deut amañ da leina,
Ha bez' ac'h eus 'te peadra? »

6 — Ar zant a respontas d'ezo:
« Neb a vagas el lec'h distro
Pemp mil den gant pemp torz vara
A c'hell c'hoaz rei d'ec'h da breja. »

7 — Hag heñ d'e feunteun ha d'e besk,
Hag o tistrei gant eun tamm fresk:
« Debrit, emezañ, va roue,
Ha roit d'ho tud merenn Doue. »

8 — Kemeret 'voe an den Doue
Da genta eskob e Kerne.
Piou c'hello biken lavaret
E breder bras 'vit e zeñved?

9 — Skoazellet mat gant ar roue
Hag an abad sant Gwenole,
E prezegas an Aviel
Hed eur vuhez hir ha santel.

KANTIK SANT ERWAN (1)

Diskan :

**Nann, n'eus ket e Breiz, nann, n'eus ket unan,
Nann, n'eus ket eur zant evel sant Erwan (diou wech).**

1. N'eus, ket en Argoad, na mui en Arvor,
Koulz ha sant Erwan 'vit an dud a vor.
2. Nann, n'eus ket er vro, 'vel ma lavarar,
Hag a ve ken mat 'vit al labourer.
3. N'eus ket kaeroc'h skouer d'an dud a lezenn
Eget sant Erwan, skouer ar veleien.
4. Ha d'ar beorien géz ha d'an dud a boan,
Nann, n'eus ket gwelloc'h eget sant Erwan.
5. Epad e vuhez eur skouer 'vit an holl,
Bevomp evelañ, ne d'aimp ket da goll.
6. Evel hon Tadou, int, tud a gredenn,
Lavaromp d'ar Zant, 'n eur gaer a bedenn :
7. Aotrou Sant Erwan, Patron Breiz-Izel,
Beza treitour d'eoec'h, nann, kentoc'h mervel!

(1) War don : eürus an hini.

KANTIK SANT POL

(TON : Kantikou toniet eskopti Kemper, pa). 34.)

DISKAN

Kanomp, kanomp a greiz kalon,
Meuleudi Sant Paol a Leon,
Ha goulennomp dre ar bedenn
Eus e vennoz an aluzen,
Ha goulennomp dre ar bedenn
Eus e vennoz an aluzen.

- 1 — Gant tudchentil uhel savet
Paol e Bro-Zöz a zo ganet;
Lagad Doue gant e vennoz,
A bare warnañ dez ha noz.
- 2 — E skol sant Iltud dizale
Paol a zesk mat lezenn Doue;
Tremen a ra e yaouankiz
Holl da Jezuz, holl d'an Iliz.
- 3 — Ermit yaouank, beleg santel,
Galvet da zont da Vreiz-Izel:
Lezil ho pro, treuzit ar mor,
Ha deuit bremañ war-zu Arvor.
- 4 — Dont a ra betek Enez-Vaz
En eur ober burzudou bras;
Digemer mat en deus eno
Digant Witur, reue ar vro.
- 5 — Gant ar reue ha gant ar bobl
Goulennet eo evit eskob,
Kenta eskob a Vro-Leon:
O! nag a joa e pep kalon!
- 6 — Eus bar an Neñv, o sant Patron
Sellit gant joa ouz tud Leon,
O kana d'eoec'h meuleudiou
Gant o c'halon hag o mouezieu.
- 7 — Grit ma chomo gwrizioù ar feiz
Doun e kalon kristenien Vreiz,
Evel gwrizioù ar gwez dero
E-kreiz kalon douar hor bro.

